

**KANTIK****ZANTEZ KATEL**

(EUZ A ALEXANDRI)

Ton : *Me laka ma c'honfiants.***DISKAN :**

Zantez Katel viniget,  
 Patronez évuruz,  
 C'houi a zo meurbed karet  
 Gant Mari ha Jézuz ;  
 Gret d'emp ni karet Doué  
 Ha karet hon nésa,  
 Evit mont gan-ec'h eunn dé  
 Enn envo da véva.

Enn déspet d'ho iaouankiz  
 Ha d'ho zempladurez  
 Ec'h eûz diskuelet dispriz  
 'Vit péb fallagriez,  
 'Vit holl vado ann douar,  
 Holl énorio skeuduz ;  
 Eunn dra 'vid-hoc'h 'wa dispar :  
 Karet, meuli Jézuz.

C'houi zo hét enn ho pué  
 Skoazel ar gristenien,

Diwallérez ho gwir fé,  
Mirérez ho lézen,  
Pa deuaz ann impalaër,  
Gant hé bécho euzuz,  
Da c'hoantad holl dizober  
Enn Iliz glàn Jézuz.

Lézen ann Oan dous ha mad,  
A wa hoc'h holl studi,  
Ho skiant 'wa dreist ho oad,  
Ho klevet 'wa dudi.  
Dré-z-hoc'h ar Speret Zantel  
A neuz sklerijennet  
Tud a skiant kent mervel  
Ha d'ann envo kaset.

Ho pried 'wa ho Zalver  
Hag ho pinvidigez;  
Ar peurest, évid-hoc'h skler,  
A wa holl tromplerez.  
Kurunen ar gwerc'hézed,  
Dreist aour hag énorio,  
A wa gan-ec'h hu karet;  
Jézuz 'wa hoc'h Otro.

War ho tal diou gurunen  
A felle d'ec'h kaet,  
Unan meurbed kaër ha gwenn,  
Eunn all gant gwad ruziet.  
Grék ho pourrev hé unan,  
Dré ho tiskadurez,

Deuz bét 'barz er Vro diboan  
Loden ar verzérez.

Spéréjo sélestiel  
War ménez Sinaï  
Deuz douget war ho c'haskel  
Korf bugel pur Mari.  
Evel hon Zalver Jézuz  
Hoc'h bét merzériet,  
War lerc'h ann Oanik peoc'huz  
Gwerc'hez ive kerzfet.

Troet éta ho sell  
War-n-omp ho pugalé,  
Plijet kas hon pédenno.  
Bété kalon Doué.  
Reit d'emp ni gwir sklérijen  
Ar fé hag fizians,  
Ma momp deuz ar gwir gristen  
Ar c'haëra espérans.

Patronez karantézuz,  
Distaget hon c'halon  
Deuz treo ar bed ma riskuz,  
Leun a demptasion.  
Ma teui ann diskadurez,  
Roet gant hon Zalver,  
Enn hon iné da rei frouez,  
Da véan d'emp holl kér,

Gret ma teui hon inéo,  
Dré Jézuz ha Mari  
Da lugerni a c'hraso,  
Glân ével hoc'h hini :  
Ma c'halfomp ni hon unan,  
Enn baradoz Doué,  
Joauz heul dré holl ann Oan,  
Béva deuz hé vué.

Gwerc'hez zantel, truézuz,  
Klévet ous hon péden,  
Eur c'hlenvet ankéniuz  
War-n-omp ni a boez krenn :  
Plijet d'ho Mestr éternel  
Kas hon huanado ;  
War hon anken gret eur zell,  
Dizéc'het hon daëro.

Rei a réomp daou-ugent devez Induljansou da  
gément-hini a gano ar c'hantik ma gant gwir  
déoliez.

+ AOGUSTIN,  
*Eskop Zant-Brieg ha Landreger.*